

## AN DEN DEK GWECH DIMEZET

### Celui qui a été marié dix fois

Dek gwech dimezet me zo bet  
Ha nav intañvez am eus bet

*Dix fois j'ai été marié  
Et j'ai eu neuf veuves*

En ur sachañ plouz da c'hezhañ tan  
Varvas ar gentañ, setu unan

*En tirant de la paille pour allumer le feu  
Mourut la première, en voilà une*

En ur vont d'ar c'hraou da c'horo ar bioù  
Varvas un all, setu oa div

*En allant à l'étable traire les vaches  
Mourut une autre, en voilà deux*

O vont d'ar c'hafe gant he c'homer  
Varvas un all, setu oa teir

*En allant au café avec sa commère  
Mourut une autre, en voilà trois*

Gant ur c'horfad krampouezh fritet  
A oa marvet ar bederet

*D'une ventrée de crêpes frites  
Mourut la quatrième*

O silañ 'n toaz d'ober he lein  
Varvas un all, setu oa pemp

*En filtrant de la pâte pour son déjeuner  
Mourut une autre, en voilà cinq*

En ur lakaat piz ha fav e glec'h  
Varvas un all, setu oa c'hwech

*En mettant des pois et des fèves à tremper  
Mourut une autre, en voilà six*

En ur lakaat ar c'havell war ar vreiz  
Varvas un all, setu oa seizh

*En mettant le berceau sur le balancier  
Mourut une autre, en voilà sept*

Tennañ ar c'havell diwar ar vreiz  
Varvas un all, setu oa eizh

*En retirant le berceau du balancier  
Mourut une autre, en voilà huit.*

Gant ur c'horfad piz ha fav  
Varvas un all, setu oa nav

*D'une ventrée de pois et de fèves  
Mourut une autre, en voilà neuf*

O vont e-barzh ar gwele beg eus beg  
Vougas un all, setu oa dek

*Allant au lit bouche à bouche  
S'étouffa une autre, en voilà dix*